

AN AMZER

Ar C'helaouennerezh Brezhonek Nevez

Skrivet em boa ar sizhun dremenet e vefe kinniget deoc'h e-barzh niverennoù a zeu AN AMZER ar peder c'helaouenn hollvrezhonek nevez.

Setu an hini gentañ: PLANEDENN. Ar wech a zeu e vo diskouezet AL LANV, da c'houde BREMAN, hag erfin AN AMZER.

PLANEDENN

Krouet eo bet PLANEDENN e-kerzh trimizvezh diwezhañ 1979. Div niverenn a zo deuet er-maez endeo: unan en diskar-amzer 1979, hag an eil er goañv 1979-1980.

Savet eo e stumm ur c'haier, ur golo plastik unliv warnañ. Ar paper implijet evit ar gelaouenn a zo tev a-walc'h, aes neuze treiñ ar pajennoù, ha gwenn splann. 64 fajenn, a vent gant re AN AMZER.

Tud eus Ar Falz a zo e penn ar gelaouenn hag a ra war he zro. Koulskoude e fell d'he renerien ne vefe ket graet ur meskaj etre an daou, ha chom a raio PLANEDENN hep pennmenoz

resis ebet: "Daoust ma 'z eo bet roet lañs d'ar gelaouenn-mañ gant tud eus Ar Falz, bez e vo eus PLANEDENN ur gelaouenn vrezhoneg araog peb tra, bountet war raog gant un nep-tuegezh digor d'ar seizh avel. Bouetet e vo PLANEDENN gant pennadoù a beb sort." (niv.1).

En niverenn 1 ez eus bet kavet ur pemp pennad bennak.

Er pennad-digeriñ e vez diskouezet perak ha penaos eo bet krouet ar gelaouenn. Da c'houde e lenner un istor berr: "Ar Pemoc'h a Umilite...". Met ar pennad-skrid em eus lennet gant kalz dudi a zo hini Mikael Madeg. Ur pennad-kaoz eo e gwirionez etrezañ ha Naig Rosmor (Karantez ha Karantez, embannet gant Brud-Nevez), a zispleg penaos e oa stad ar merc'hed e-pad he bugaleaj en he c'horn-bro. Aes da lenn, ha dudius, dreist-holl evit ar re yaouank a-vremañ ha n'o deus ket anavezet ar stad-se: mui-oc'h a cheñchamantoù ez eus (Kendalc'h pajenn 2)

GWENER 28 MEURZH 1980

NIVERENN 17 4 FAJENN 2 LUR
2vet bloavezh Bep Gwener

Mererezh, Skridaozerezh:
2 strada ar Richardiere
35100 ROAZHON

KELEIER

ETREVROADEL

- E Londrez ar c'hKef digoll etrevroadel (F.I.I.), kevredigezh bet savet e 1971 gant an O.M.C.I. (Kenaozadur Etrevroadel Reiñ-alioù diarbenn ar Mor), a vez hec'hefridi plediñ gant peñse ar batimantoù, a raio war-dro afer an TANIO e 1981.

- Bernez Mc Ginn, 22 anezhañ, ezel eus I.R.A. (Lu Dieubiñ Iwerzhon) en deus dalc'het e-pad un devezh daou bried en Iwerzhon. Lezet en deus anezho da vont a-raok mont e-unan dirak ar boliserien evit bezañ harzet. Goulennet en doa un aotre evit kuitaat e vro goude bezañ bet kondaonet dre zesfailherezh da chom en toull e-pad 10 bloavezh. - (Kensk.)

- Drouklazhet eo bet an Ao Romero, arc'heskob San-Salvador (Bro El Salvador), dilun tremenet. Anavezet-tre e veze dre ar bed evit ar stourm a rene evit ar frankiz ha gwirioù pep hini da soñjal dieub.

- Gwallzarvoud pouezus e Mor an Hanternoz. Unan eus savennoù toullerezh tireoul "Ekofiks" a zo bet distroadet gant nerzh ar mor. Tud 'zo a zo bet saveteet, met ouzhpenn 100 den a chom e-barzh ar savenn, pe a zo bet lazhet gant ar mor. 8 korf a zo bet adkavet hag ur c'hant bennak a dud a zo bet saveteet. E-touez an dud steuziet ez eus skipailh ul lestr deuet war an dachenn evit skoazellañ ar saveteerien.

- Emañ adarre Itali hep gouarnamant. Evit nouspet gwech abaoe ar brezel diwezhañ en deus roet ar gouarnamant e zilez.

- Trubuilhoù e Tchad. Emgann a zo etre lu ar prezidant hag hini Hissene Habre.

BRASAÑ HA KLOKAÑ GERIADUR EUS AR BREZHONEG

GERIADUR ISTOREL

AR BREZHONEG

Roparz HEMON

eil embannadur

PREDER Penn Menez PLEUVEILH
29000 KEMPER

ar brezhoneg war an telex

Lod brasañ ar c'heleier a lennit war ar bajenn tri a zo bet kaset eus Sant-Brieg da Roazhon dre dTelex. Kenskriver pouezusañ ar gelaouenn a chom e Bro Lanuon, ha betek-hen e oa implijet daou zoare da gas betek ar gelaouenn ar c'heleier: ar c'harr hag al lizhiri. An eil a goust ker hag egile n'eo ket sura-walc'h (kalz keleier skrivet gant kenskriverien 'zo a zegouezh re ziwazhat, siwazh, dre ar post; An Oriant-Roazhon: 2 zevezh d'an nebeutañ gant un timbr 1,30 lur!).

Neuze hon eus divizet d'ober gant doareoù an amzer a-vremañ: adalek ar sizhun-mañ e vo implijet an telex-public etre hor c'henskriver kentañ hag hor skridaozerezh, e Roazhon.

Sebezet eo bet tud ar post, ar wech kentañ e welont brezhoneg war o ztelex. Ar wech kentañ eo, a gav deomp, eo bet implijet hor yezh war seurt benveg! Koust a ra nebeutoc'h eget ar c'harr-tap, ha tizh a zo gant an doare-se: e-korf ur c'hardeur e vez kaset holl geleier Breizh (pe dost), ar sportoù hag al lod bras eus "Buhez Sevenadurel".

Divizet hon eus ober gant an teknik modern: troet groñs eo AN AMZER war-du hon amzer-ni, hag ar pezh a c'hell an teknik arnevez (modern) degas d'ar brezhoneg a zo mat evidomp (ma ne goust ket re ger).

Ma 'z implijomp an "telex", eo dleet deomp treiñ "telex" e brezhoneg.

Bez ez eus dija: pellgomz=telephone. Kinnig a reomp: pellskrid: telex. Pellskrid a vez dija implijet evit "télégramme". Neuze, penaos ober?

Gortoz a reomp ho kinnigoù.
AN AMZER.

SPORTOÙ

ABADENNOU MELLDROAD

- Rummad kentañ:
 - Brest 0/2 Angers
 - Naoned 2/0 Nancy
- Eil rummad:
 - Roazhon 1/0 An Havr-Nevez
 - Kemper 0/1 Chateauroux
 - Gwengamp 2/0 Angoulême
- Trede rummad:
 - AS Brest 2/2 US Normandi
 - US Konkerne 1/0 US Ar Menez
 - St. St Brieg 1/1 Pariz SG
 - St. Brest 0/0 Racing
- Rummad a enor:
 - US Kleder 0/3 E. St Laorans
 - AS Plouhineg 0/6 EA Gwengamp B
 - USSC Redon 3/3 US Berne
 - AS Lanester 3/3 US St Malo
 - Louanneg SP 1/1 DC Karazec
 - St. Roazhon 0/0 St. Lanuon
 - FC An Oriant 1/6 SO Maine

ABADENNOU RUGBI

- RO An Oriant 17/0 Tours EC
- St Nazer 16/4 St Jermen
- RC Gwened 10/20 Naoned VS

AN AMZER
2 straed ar Richardiere
35100 ROAZHON

Kelaouenn sizhuniek
CPPP 62319

Rener ar gelaouenn:
Mark DECAMBOURG

KOUMANANTOU:

3 MIZ (12 niverenn):	
Reizh:	18 lur
Studierien, skolidi:	12 lur
Skoazell:	20 lur
6 MIZ (24 niverenn):	
Reizh:	36 lur
Studierien, skolidi:	24 lur
Skoazell:	40 lur
12 MIZ (48 niverenn):	
Reizh:	72 lur
Studierien, skolidi:	48 lur
Skoazell:	80 lur

KRP (Decambourg): 25.97V Roazhon

Moulet ez eus bet 500 sk.
ag an niverenn-mañ

Ar C'helaouennerezh

Brezhonek

Nevez

(Kendalc'h ar bajenn 1).
bet e-pad an tregont bloavezh tremenet eget biskoazh, er c'hêrioù koulz ha war ar maez. Goude un istor all hag un nebeut barzhonegoù gant Yann Diarc'hen, e kaver pennadoù-kaoz "diwar-benn an desevelbugale e brezhoneg".

An niverenn 2 a zo gouestlet tost penn-da-benn da bezhioù-c'hoari, ha da levr Yeun ar Gow "E Skeud Tour Bras Sant-Jermen" (embannet gant Al Liamm), ur pennad skrivet gant Fañch Morvannou.

Re "vras" ar brezhoneg implijet e-barzh AN AMZER... ar c'hontrol eo evit PLANEDENN: skrivet eo evel e gomzer... met ne gav ket din eo un abeg evit ober rebechoù...

Mat an danvez, mat ar yezh, mat ar stumm: setu ar pezh a c'heller skrivañ diwar-benn PLANEDENN.

Mark SEURIALL.

TITOUROU

PLANEDENN

- 4 niverenn e-korf ar bloavezh Burevioù:
- 1 plasenn ar Marc'hallac'h 29210 Montroulez
- Koumanant-bloaz: 50 lur
- Koumanant-skoazell: 60 lur, hag ouzhpenn
- KRP (Gourmelon): 158854P Roazh. 15 lur pep niverenn
- Meneg ebet eus niver ar skouerrennoù a zo bet moulet.



war-dro Tregastell

Rann danevell 1980 al lanv du: hanter muioc'h a vanifesterien eget a zastumerien.— D'ar Sul 23 a viz Meurzh o deus 5.000 a dud baleet 7 kilometr ad war o zfreid eus Tregastell, da bPoullmanac'h evit enebñ ouzh gorregezh ha diefedusted "Kenurzh Enepsatradur ar Mor" (Plan Polmar). Bremañ ez eus 2.500 den, soudarded ha paotred an tan, o naetaat loustoni-

où an TANIO. Kailharet eo bet ivez aodoù Bro Leon ha bae Sant-Brieg. Annezidi aodoù Normandi o deus avi: Gortozit eta, chom a ra 10.000 tonennad eoulmaen e korf mac'hagnet an euzhvil. Prefed Aodoù-an-Hanternoz en deus divizet gervel ar C'huzul-Departamant d'en em vodañ d'an 11 a viz Ebrel en un abadenn dreist-ordinal. J.M.

UR SIZHUNVEZH E BREIZH

Sant-Brieg.— An dud e karg oaledoù al Labourerien Yaouank (F.J.T.)/Breizha oa bodet evit ar wech kentañ d'ar Sul 23 a viz Meurzh. Diskleriet o deus e oa diaes-oc'h-diaes dezho ober o labour, kozh ha diamzeriet evel ma vez savadurioù an oaledoù.

Redon.— An Ao Madelin, kannad ar c'horn-bro, en deus c'hoant e vefe savet ur skingomz hollvrezhoneg hag ouzhpennet un eurvezh bemdez war rollskign (program) F.R.3. Galloeg er skingomz a c'houlenn hemañ ivez. "Ar Gembreiz o deus tu klevout ha gwelout buhez o sevenadur dek gwech muioc'h egedomp, ar pezh n'eo ket reizh" emezañ.

Kemper.— D'an 9, 10 hag 11 a viz Ebrel, e skol Sz Anna, en em zastumo ar studierien yaouank kristen (J.E.C.). Kaoz a vo ganto eus "perzh ar skol-idi er skol hag er gevredigezh".

Karaez.— Prefed Penn-Ar-Bed en devoa goulennet ouzh an ti-kêr kas lod eus e implijidi da naetaat an aodoù saotret. "N'ho peus nemet lakaat an archerien bet implijet e Plogoñv war al lerc'h" a respontas hemañ.

Naoned.— Ar c'hounezerien legumaj dindan tiez-gwer a zo

droug enno dre m'eo aet priz o c'henderc'hoù d'an traoñ abalamour d'ar re a zo o tont eus estrenvro. Kerzhet o deus stank dre straedoù ar gêr d'ar Yaou 20 a viz Meurzh.

Karnag.— Manifestiñ o deus graet d'ar Sadorn 22 a viz Meurzh skolaerien ha kelennerien skolioù prevez ar Mor-Bihan evit lakaat al lezenn Guerneur da dalvezout penn-dabenn. Met an Ao ministr ha maer ne oe ket eno evit o degemer.

Naoned.— Emañ aerborzh Kastellvougou o vont war-raok. Bez ez eus bet 373.000 treizhad e 1979. Hervez Kambr Kenwerzh ha Greanterezh Naoned, a ra war-dro an aerborzh, 440.000 a dud a gemero ar c'harr-nij e-korf ar bloavezh.

Sant-Nazer.— Rann gresian ar "Public Power Corporation" he deus goulennet ur gwrezva digant Alstom-Atlantel.

Ar Baol.— Ar Baol-Dakar: setu hentad ur redadeg-vor bet krouet nevez 'zo. "Redadeg an Amaldies" he anv. D'an 19 a viz Here ez ay ar bigi kuit diouzh Ar Baol, ha war-dro an 9 a viz Du e tegouezhint e Dakar.

EMVOD r.p.r. e Brest

Brest.— D'ar Sul 23 a viz Meurzh, da genver bodadeg rann Breizh ar strollad R.P.R., en deus ar sekretour-meur, an Ao Pons, graet al lu d'e gamaladed eus ar gouarnamant: "Ouzhpenn ar pevar doare-renkemeret gant an Ao prezidant, emezañ, me lakfe ur pempvet: lavarout d'an Aotrou Barre ha d'e skipailh mont kuit". Ouzhpenn-se o deus ar "Golisted" kinniget ma vije krouet ur servij "mirourien aodoù" (Coast Guards) evit difenn hon aodoù-ni, ha listri-splujerien (sous-marins) atomek ouzhpenn evit difenn Bro-C'hall.

dre vras

— Dalc'het e vo foar etrevroadel Naoned eus an 11 a viz Ebrel betek an 22.

— E Pempoull e vo d'ar Yaou 27 a viz Meurzh un devezh "Kêr Varv", en abeg d'ar reverzi du. Serret ar staliou-koñvers, ar skolioù, an ti-kêr.

— E Pariz o deus 5 paotr eus Bro Dreger ledet eoulmaen hag evned saotret dirak Palez an Elysée. "Brokus ez omp e-keñver hon frezidant, emezo, ingalet meump (hon eus) gantañ prof an TANIO.

AN AMZER

BEP

SIZHUN

HO KELEIER

brezhonek

2 LUR AN NIVERENN

1,50 DRE GOUMANANT

1 LUR skoldi studierien

GOUEL AR BREZHONEG

e PLABENNEG

14-18 MAE 1980

BUHEZ SEVENADUREL

BRO ROAZHON

ROAZHON

Sal ar Geoded (str St Loeiz),
1 Ebrel, 20e30: Annkrist.

Ti Yaouankiz Ar Paillette, 3
Ebrel: ar strollad rok "12°5".

Ti ar Sevenadur (1 str. Sant-
Elie, PG:30.70.60), 30 Meurzh,
14e30 ha 17e30: film-tro
"Feerie-Caraïbes".— Betek ar
5 a viz Ebrel: skulterezh,
gant A. Carmassi; betek an
30 a viz Ebrel: poltredoù
diwar-benn ar c'horoll, gant
A. Dugas.

C'hoariva ar Barcherezh (straed
ar Barcherezh, PG:79.47.63),
28 ha 29 Ebrel: Molière-
Boulgakov (T.B.M.).— Etre an
31 a viz Meurzh hag ar 4 a
viz Ebrel: Electre; (e galleg
an daou).

Sal "L'Espace" (43 bd T.A.),
1 Ebrel, 20e30: Lene Lovicht;
3 Ebrel, 20e30: Feed Back
(France Inter), Original
Miror; 5 Ebrel, 20e30: Marquis
de Sade.— Feurmiñ: Disques
Opus (30.92.56); Roazhon-
Muzik (79.10.40).

Iliz-Veur, 1-3 Ebrel, 20e30:
Ar Pasion hervez Sant Yann
(J.S. Bach), gant laz-kanañ-
iliz-veur Roazhon.

Fiñvskeudenndioù: roll ar film-
où a vez roet dre ar bell-
gomz:
Gaumont (8 sal): 79.44.40;
SOREDIC (9 sal strewet e
Roazhon: Ariel (4), Club (2),
Pariz (1), Regent (1), Boite
à Films (1): 79.08.64;
Zen: 30.09.85;
Zoom: 50.45.71;

Ti ar Sevenadur: 30.70.60;
Arvor, Loren: PG ebet.

Er sizhun-mañ, etre disadorn
ha diriaou a zeu (3 Ebrel), e
Ti Ar Sevenadur, e vezo ur
sizhunvezh dor digor war ar
c'horoll, gant skolioù koroll
a bep seurt (klasel, modern,
breizhek...).

Bemdez, etre kreisteiz hag
hanternoz, diskouezadegoù kor-
oll war al leurenn, ha kentel-
ioù koroll evit ar re a fell
dezho deskiñ.

N'eus netra da baeañ.

A.L.

HEDE

C'hoariva Libaut-Estier, d'an
3 ha d'ar 4 a viz Ebrel:
Mezeg en despet dezhañ, gant
Moliere (c'hoariet e galleg).

FELGER

Sal ar Befrez, 1 Ebrel: Four
or Five (jazz).

BRO-NAONED

OURVEZ

Sal ar Frebaudiere, 29 Meurzh:
Fest-noz, gant Ar Falz.

SANT-NAZER

Cameo & M.J.E.P., 1 ha 2 Ebrel,
15e00: abadenn evit arvugale,
gant M. Dranguy ha G. Burtin.

BRO WENED

REDON

Sal gozh ar Gouelioù, 29 Meurzh:
Anna Vanderlove.

ARZHANO

Bourc'h, 29 Meurzh: fest-noz,
gant Miniou-Vallegant, son-
erien ar Faodel, h.a.

KERANNA

Bourc'h, Sul diwezhañ miz Ebrel:
pardon ar vrezhonegerien.

AN ORIENT

Ti Karter Koad ar C'hastell,
30 Meurzh, etre 10e00 ha
18e00: abadennoù diviz di-
war-benn al labourdouar e
Breizh.

BRO GEMPER

ROSTREN

Sineklaub (fiñvskeudenngelc'h)
ar Gael, 2 ha 3 Ebrel: Feul-
ster ha Trivliad, gant Vis-
conti (e galleg).

KONKERNEV

Kreizenn Arzoù ha Sevenadur,
3 Ebrel, 20e30: Jil Servat
(abadenn skoazell d'ar bri-
zonidi vrezhon).

LANGONNED

Sineklaub (fiñvskeudenngelc'h),
29 Meurzh: Avoir 20 ans dans
les Aurès, gant R Vauthier.

SKRIGNAG

Bourc'h, Lun Fask: Devezh Yann
Vari Perrot.

bro st brieg

SANT-BRIEG

Roc'h Marzhin, 30 Meurzh, 17e00:
sonerezh klasel, gant ar
strollad "Variation". War
roll ar sonadeg: oberennoù
Chopin, Schumann, h.a.

Sal Robien, 29 Meurzh: fest-noz
evit Diwan.

Fiñvskeudennoù ar F.A.C., 29
Meurzh: Amarcord, gant Felli-
ni.

JUGON-AL-LENNOU

Keroueze, 4 Ebrel: Roll-Mops
(abadenn rok).

PLEHEREL

Bourc'h, 29 Meurzh: fest-noz,
gant Kanfarted Rostren,
Galorn, h.a.

BRO VBREST

BREST

Pariz, 1 ha 2 Ebrel: The Rub
a dub Jug Band (sonerezh a
Vro Gembre).

P.A.C., 2 Ebrel, 14e30: An
Oadvezh Evurus, fiñvskeudenn
gant Agostini.

LANDERNE

Ti Dede, 30 Meurzh: The Rub a
Dub (muzik a Gembre).

GWIPAVAZ

Kerkoko, 30 Meurzh, 15e00:
abadennoù gant M. Favenneg,
Strollad ar Vro Bagan, aozet
gant Ti Lann Vihan; fest-noz
gant An Diaouled.

PLOUNEOUR-MENEZ

Ti Lautrou, 4 Ebrel: "Salm Ruz"
Miklos Jancso (fiñvskeudenn).

500

KOUANANTER

hon eus ezhoml

1.000 gwelloc'h

A
N
A
M
Z
E
R

bruderezh amañ !

GWELET EO !